

Le Jean, Eostik Koat an Noz (Plounerin 1831 – Pariz 1877).
D’an Aotrou Charlez a Vro-Hall.

D’an Aotrou Charlez a Vro-Hall

Barz Breizad, e Pariz

Ar Gonideg, sav da benn
Ha bez hirio laouen !!...

Sutal a ra an avel skiltruz er gwez uhel ;
Krozmolad a ra ar mor en-dro da Vreiz-Izel ;
Hag al logodennig-dall, gand diouaskell krohen,
A nij kreñv ha kamm-digamm a-raog¹ pao ar gaouenn.

An deliou, war ar geot glaz, a ruill strobinellet
Evel eur bagad teuziou a bep tu dastumet ;
Hag ar bleizi, o yudal, a daol gand an hekleo
Eun dourni hag a rafe d’an oll sevel o bleo !

Ar streig, en eur glemma en he gwele meineg,
A ya da gas he dour sklêr d’ar mor braz izlonteg² ;
An deñvalijenn a drid war gern ar herreg sonn,
Ar yourh, e-touez ar strouez, en em guz gand spouron.

Ha peger kaer eo an deiz, pegen teñval an noz !
Ma Doue, c’hwi ‘ra traou kaer, ha ganeoh ma bennoz !
Gand daoulagad mad on dall ; hogen setu al loar
O tond da sklêrijenna bugale an douar !

Salud dit, loar arhanteg, rouanez vraz an noz,
Sav da benn war Menez-Bre³, sav a-uz Koad-an-Noz⁴ ;
Sav eta, sav uhelloh, dalh da zevel bepred,
Ma hello an oll varzed ‘n em gaoud amañ kevred.

Taliesin ha Marzin, Gwennhlan, diouganer braz,
Brizeug, Gizouarn⁵, Karis⁶, c’hwi ‘zo maro, siwaz !
Degasit ho telennou e-harp troad an dervenn
El leh ma vezo ar stroll, kleuk⁷, didrouz ha kempenn⁸.

¹ a-raog : dirag.

² izlonteg : izlonkou a zo er mor. (Ger bet ijinet gand an oberour).

³ Menez-Bre : Gand an dud e vez lavaret “mond da foar Vre”.

⁴ Koad-an-Noz : ano eur hoad e-kichenn Benah.

⁵ Gizouarn : ?

⁶ Karis : ?

⁷ kleuk : ne vo ket kalz a dud (hevez skrid galleg an oberour).

Tavit mik, avel rageost, ha c'hwi sterig klemmuz,
It d'ho toull, bleizi naoneg, teñvalijenn spontuz ;
Heñchou fankeg ha mein-ruill, gouvezit degemer⁹
Madoberour or mamm-yez, ar Barz, or Pennsturier.

Diwallit da ober droug d'an hini 'zo goude,
Anvet Yann Willou Herri¹⁰, hennez eo barz Kerne ;
Diwallit da zivera, c'hwi koumoulenn du-bran ;
'Vid ma hellint azeza war ar gador douskan.

Sant kaourantin ha sant Paol, ha c'hwi roue Gradlon,
Degasit, war-bouez e zorn, amañ 'barz bro-Leon ;
Roit eun hinkane wenn d'an aotrou Lezeleug¹¹,
Ha ganti c'hoaz ho pennoz, pa vo e droad er stleug.

Sant Padern, Sant Meldeog, Justog ha Gobrien,
Dougit war eur hravaz vrug unan ho peleien¹²,
Va Aotrou Er Joubiou, eskob a Itali,
Hag e teuio barz Gwened ken êz ha pep hini.

Aotrou person sant Laorañs, Kemar, den kaloneg,
Hastit, en ano Doue, dond amañ da brezeg ;
Ho patron hoh ambrougo gand e hrill goz verglet ;
Evel ma viot gwelet, e viot anavezet !

Tostait, suteller noz,, grit eur zutelladenn,
Ha c'hwi sperejou Awenn, grit peb a youhadenn
Ken a greno an douar, da embann d'ar varzed
Hasta buan dond amañ ; it zoken d'o herhed.

Mad ! setu int oll erru ganeoh en eun taol krenn.
Me a wel an Aotrou Klerh, barz koz ar Rungolvenn,
Gourhant, person Gwiseni, Kerzale, barz Plouneour,
Ha Milin, barz Plouzeniel, paotred hag a gan flour.

Sell, barz Kastellfidardo, Kere, beleg e Brest,
Sell c'hoaz Perrot, barz Taole, da gana atao prest ;

⁸ kempenn : tud euz an dibab (hervez an oberour).

⁹ gouvezit degemer : degemerit mad.

¹⁰ Yann Willou Herri : (Melleg 1803 – Kemperle 1880).

¹¹ an aotrou Lezeleug : ?

¹²unan ho peleien : unan euz ho peleien.

Sell Gwegen, barz sant Ujen, Kastreg, barz Brenniliz,
Stangened, barz Tregourez, oll kanerien diskuiz.

Hastit dond, Aotrou Roudod, c’hwi a zo dilerhiet ;
Moavard e oah adarre o vale er vered ;
E-touez beziou an anaon ar feiz a zo gwall greñv,
Ha setu oh anvet mad barz *Bali euz an Neñv*.

Bremañ p’ema o starda kerdin aour e delenn
Barz pe eostik Koad an Noz, d’ho lakaad oll laouen,
Deut ivez, barzed ar bed, o kleved e vouez voan,
Rag boulhet mad eo an noz ; diredit ‘ta buan.

Diredi, Koronal ker, “barz ar vugaligou”,
Troud, er peoh ker kuñv bremañ ha taer en emgannou ;
Taolet hoh-eus ho kleze da gemer eur bluenn
Da skriva e brezoneg *Skwer ar Gristenien*.

Azezit war gein ar goulm, Milin, “laouenan Breiz”,
Hastit dond gand an Uhel, ar barz c’hwek, en or hreiz ;
Ha c’hwi Kaourantin Tomaz, anvet “barz an Tour-Tan”,
Mall braz eo warnom-ni oll da gleved c’hoaz ho kan.

Itron Varia Remengol, mamm vad ar Vretoned,
Degasit deom, me ho ped, ho pazr muia-karet ;
E vouez, ker leun ha ken drant a frealzo an oll
Pa lavaro : na lezit den ebed d’en em goll.

Ha te, roh ar strobinell, pe welloh Roh-al-laz,
Degas deom ivez Rannou, Breizad stard a-viskoaz,
Gand e *Laouenidigez da oll varzed ar vro*,
Kerkoulz hag ar “hlahar-gan¹³”, savet a-nevez ‘zo.

Ne peleh out-te, Mindu, ki lemm barz Gwerliskin ;
Peleh ema Prosper Proux, da vestr drant ha lirzin ?
Kerz da lavared dezañ ema ar Varzed all
Strollet e-kreiz Koad-an-Noz ouz e hortoz raktal.

Galvit gand ho sutell aour, Gradlon, ho parz Fave,
Hag e Plounevez-Kintin he hlevo mad ivez
Eur hloareg a gar e vro ; sevel a ray e benn,
Hag an daou varz a zeuio skañv a droad ha laouen.

¹³ glahar-gan : klemmgan (bet savet gand an oberour).

‘Vel ma paouez an eostik da gana e werz koant,
E tosta barz sant Laorañs, hag eñ sioul ha drant,
Da dal ar gador douskan, hag e sav ar Sturier
Da zegemered ganatñ barzed nevez Treger.

An Hegarad, barz Ploueg, barz Kawan, ar Habek,
Gwionvarh, ha c’hoaz ar Gall, tud lemm ha speredeg,
A gan eur zon da hoarzin, pe *Kantik Sant Erwan*,
Hag a lenn toridigez dihall¹⁴ ha meurbed glan.

Kerkent an Aotrou Vannier, barz deol sant Heñvel,
A zispleg en e iliz bep sul an Aviel,
A gan gwerz e zant Patron hag e gan ker kompez
Ma laka er halonou dudi ha levenez.

Ken a ro d’an oll varzed ar Penn-Sturier eur zell :
« Trugarez deoh, emezañ, c’hwi a gar Breiz-Izel
Hag he yez, evel Brizeug, Durand, Gwillom, Lukaz,
A zo er gwele douar¹⁵, kousket ennañ, siwaz !

N’ouzoh ket c’hoaz marteze da betra oh galvet
Da droad an dervenn goz-mañ ? Klevit eta, barzed,
Eur helou espar-meurbed, eru helou souezuz ;
Na grenit ket koulskoude, n’e’ ket unan spontuz :

Eun Aotrou ouz a Bariz, Charlez ‘Vro-Hall anvet,
Den gouizieg ha kaloneg, en-desu eur werz savte
En or yez, desket gantañ dre garantez d’or bro ;
Breiziz, greom on dlead, meulom oll e ano.

Goulennom digand Doue ma vo heuliet e skwer,
Ma raio kalz eveltañ euz or henvroiz ker,
Hag eun deiz ar brezoneg, enoret gand an oll,
A jomo en or bro gêz heb mond biken da goll !

Bremañ eta, Kenvreudeur, leverom, en eur vouez,
E kasom da varz Pariz, da dremen e enkrez,
Or halonou, or bennoz ; ma vezo frealzet
Pa ne hell dond d’ar vro-mañ a gare kalz kalz gweled. »

Hag evel eun alhweder, pa zav a-denn-askell
A-uz d’e neizig kuzet e gwiniz Breiz-Izel,
E sav pedenn ar varzed ; hag oll, en eur dridal,

¹⁴ dihall : tamm galleg ebed e-barz.

¹⁵ er gwele douar : en o bez.

E leveront : « Ra vevo pell Charlez a Vro-Hall ! »

Eun deiz war-lerh, da zav-heol, e-harp troad an dervenn,
E oa ar gador douskan ha warni eun delenn ;
Telenn an hini a gar kana a-hed an noz
D'an be a ya da gleved gweziou e *Koad-an-Noz*.

Eostik Koat Ann Noz